

## XXXII

**AR MERC'HED IAOUANK DIWAR DRO GWENGAMP**  
**(Les jeunes filles des environs de Guingamp)**

Oh na barz en Plouisi emañ

O ié

Oh na barz en Plouisi emañ  
 Emañ ar merc' hed fierañ

Be o deuz boto war lerenno  
 Hag en o zreid eur chossono

Ha trouz an aour hag an arc'hant  
 Zo gand merc' hed iaouank Gwengamp

Na c'houez ar mogad pelo pri  
 Zo gand merc' hed er Boderi

Na c'houez o c'hoc'h n'ho c'hotillon  
 Zo gand merc' het Sant Aganton

Merc' hed iaouang dimez a C'hras  
 Ar ré zé zo louz e pep plaz

Merc' hed iaouang a Plouagoar  
 N' hini né ket tomm zo kluar

Merc' hed iaouang deuz Sant Lauranz  
 'Ré zé a c'hoarz tro pad an danz

N'ha deuz en kosté Pommerit  
 A zo diou blac'h a lar mond kuit

Ha mont a rint sur hep dalé  
 Pé gwir n'ho deuz den da valé

Kaer ho deuz mond d'ar pardonnio  
 Ré zé 'n nefé na per na krao

Merc' hed iaouang a zanté Kroez  
 Ar ré zé zo raouiet ho mouez

Merc' hed iaouang deuz ar Merzer  
 Kaer ho dillad, fanket o rér

Merc' hed iaouang deuz a Bontrev  
 Glas ho lagad melen o blev

Merc' hed iaouang a Blouagat  
 Ar ré zé o deuz kalon vât.

On a fait sur cette chanson des couplets qui n'ont pas de fin, car chacun veut ajouter le sien.

L'air n° 33 offre cette particularité qu'il conclut sur la sus-tonique, ce qui ne peut guère s'expliquer musicalement. Il faut admettre qu'il y a ici une suspension à la fin de chaque couplet pour passer au suivant, comme dans les psaumes de l'église (1).

Air n° 33.

Oh na barz en Plou-i-zi e-man, oh ie, oh na barz en Plou-i-  
 -zi e man, oh na barz e Plou-i-zi e-man ar mer-c' hed fie-ran.

(1) L'air du *Libéra* que l'on chante en Bretagne conclut également sur la sus-tonique.